

AR

# BUGUEL FUR

HAC

AN DOCTOR



LANNHUON

E ty Intanvez AR GOFFIC, levrer

—  
1870

THE HISTORICAL

AND HERALDIC

ARMORIAL

OF THE HOUSE OF BRUNSWICK

AND LATER OF LÜNEBURG

WITH A HISTORY OF THE HOUSE OF WÜRTTEMBERG

•••••••••••••••••••••  
**DIALOG**  
ETRE  
**EUN DOCTOR HAC EUR BUGUEL**

---

*An Doctor.*

BONJOUR, Mabic, pelec'h it-hu ?

*Ar Buguel.*

Da glask eur Mestr e zân eun tu.

*An Doctor.*

Me zo Doctor, ha mar kirit

Me-raï scol dec'h, mar am pedit.

*Ar Buguel.*

Bet oun er scol gant Doctoret,

Ha tout o c'havant borodet,

O clask deski da beb·unan

Ar pez ne ouzont ket o-hunan.

*An Doctor.*

Petra ne oar an Doctoret ?

*Ar Buguel.*

Meur a dra zo ne ouzont ket.

*An Doctor.*

Ha te a oar mui eguento ?

*Ar Buguel.*

Mar kirit, ni a zisproto.

*An Doctor.*

Te da zisput ouz eun doctor !

*Ar Buguel.*

Ho respont a rin gant enor ;

Ha na oufac'h goulen netra

Na roïn rezon dec'h anezâ.

*An Doctor.*

Piou en d'eus crouët ar bed-man ?

*Ar Buguel.*

Nep a rîr Doue anezan.

*An Doctor.*

Ha te oar petra eo Doue ?

*Ar Buguel.*

Allas ! ne oun ket , na c'honi ive :

Dre ar feïz deomp-oll eo desket

Kement a zo en deuz crouët,

Var guement zo eo souveren,

Da guement zo e courc'hemen ;

An nep ne zentont ket ountâ

Ne vank james d'ho funissa.

Ouspen, ez eo universel,  
E c'hel tout, ez eo éternel ;  
Mes ne onfe den explika  
Na renta réson anezâ.

*O altitudo!* na ellomp ken :  
Adoromp en hep e gompreñ.

*An Doctor.*

Petra dle an oll da Zoue ?

*Ar Buguel.*

E zervicha corf hac ene.

*An Doctor.*

Peur na renos er servicher ?

*Ar Buguel.*

Pa ra peb-unan e zever.

*An Doctor.*

Petra eo never peb-unan ?

*Ar Buguel.*

Never an oll guittibunan.

*An Doctor.*

Petra eo never an Doctoret ?

*Ar Buguel.*

Pratika ar mad o d'eus desket,

Rac inutil ha coll amzer  
Eo c'iski ar mad hep ê ober.

*An Doctor.*

Petra eo never eur Buguel ?

*Ar Buguel.*

Diski beza eun den santel.

*An Doctor.*

Peur en em goll eur c'hrouadur ?

*Ar Buguel.*

Pa ro d'e dad displijadur.

*An Doctor.*

Petra ra dezàn mont da goll ?

*Ar Buguel.*

Beza re lezet en e roll.

*An Doctor.*

Pelec'h e tesker follentez ?

*Ar Buguel.*

O c'henti goal compagnuez.

*An Doctor.*

Piou zo danjerus o c'henti ?

*Ar Buguel.*

Nep zo sujet da sotoni.

Dibaot buguel a c'hent tud sod,  
Eus o sotoni na zesk lod.

*An Doctor.*

Piou a respont eus anezo ?

*Ar Buguel.*

Nep a zo tad ha mam dezo.

*An Doctor.*

Petra eo never tad ha mam ?

*Ar Buguel.*

Miret o bugale divlam.

*An Doctor.*

Penos ec'h ellont-y ê ober ?

*Ar Buguel.*

Oc'h o suja da chom er guer :

Mar o lezont re da vale,

E teuint libertin hep dale.

*An Doctor.*

Peur e tleer o instrui ?

*Ar Buguel.*

Dious o speret, dre ma tui.

*An Doctor.*

Peur e tleer o c'horija ?

*Ar Buguel.*

Pa zint bian, eas da blega,  
Facilloc'h eo plega planten  
Eguet na deo plega guezen.

*An Doctor.*

Peur e tleer o demezi ?

*Ar Buguel.*

Pa o d'eus oad ha fantasi.  
Guel eo abret demezi merc'h  
Eguet na deo caout keuz varlerc'h.

*An Doctor.*

An tad, ar vam hac int a dle  
Ober stad eus o bugale ?

*Ar Buguel.*

Tad a ra stad eus e vabie  
En desk da veza mab prodig ;  
Ha mam a ra stad ouz he merc'h,  
Peur-liessa a öuel varlerc'h.

*An Doctor.*

An tad, ar vam, hac int a dle  
Reï o zraou oll d'ho bugale ?

*Ar Buguel.*

Sotoni bras ve da eun dêñ  
Discrêgui eus tout e voyen,  
Ha rancout goulén goudese  
E ezomiu ous bugale :  
Seantoc'h eo goulén oc'h tad  
Evit d'an tad goulén diouz mab.  
Guelet hon eus meur a exempl  
Etouez tud crê ha tud sempl,  
Ar vugale o kass ractal  
Ho zad, ho mam d'an hospital.

*An Doctor.*

Pe etre piou en tieguez  
Ne vez nemeur a garantez ?

*Ar Buguel.*

Etre bugale ha lesvam.  
Ispicial mar deu d'ho blam,  
Rac al lesvam ne ket caret  
A galon vad gand minoret :  
Dibaot lesvam a gar ive  
Bugale-all keït hac he re.

*An Doctor.*

Ha te oar micher priedou ?

*Ar Buguel.*

Clêvet e meus o doareou.

*An Doctor.*

Peur vez carantez etreze ?

*Ar Buguel.*

Pa na zeffot netra deze.

*An Doctor.*

Ha peur e vank an union ?

*Ar Buguel.*

Pa vank dezo pourvision.

*An Doctor.*

Ha peur e vezont en coler ?

*Ar Buguel.*

Pa vank unan en e zever.

*An Doctor.*

Piou a zo cassaüs d'an oll ?

*Ar Buguel.*

An diaoul hac eur c'hreg foll.

En eun desert eo guel beza

Ha caout eno peoc'h da veva

Evit n'en deo chom assambles

Gant greg ebet, mar dê folles.

*An Doctor.*

Hac ar graguez a gar ar guin ?

*Ar Buguel.*

Eus a enor n'en dint ket dign.

Eur vreg zo custum da eva

A bep tout ne dai netra,

Oc'h peb honestis e ser dor,

Hac oc'h peb pec'het e tigor.

*An Doctor.*

Petra servie'h canna eur vreg ?

*Ar Buguel.*

Lacât e maliç da redeg.

N'en d'eus serpent danjerussoc'h,

Leon ua dragon terruploc'h

Eguet eur vreg zo en coler ;

Ous e c'hanna zo mil danjer.

*An Doctor.*

Pelec'h caffet-hu eur vreg vat ?

*Ar Buguel.*

D'an Env 'ranker mont d'he c'herc'hat.

*An Doctor.*

N'ac ar plac'het, va buguel kès,

Ha te c'heus oute carantez ?

*Ar Buguel.*

Va zad en d'eus va c'helennet

Ne dostaïn james ous plac'het,

Rac tremplus int cals aneze,

Ha collet ar bed-mâ gante.

O min a zo douç eguis mel

Hac a zeboch meur a vuguel ;

Mes ne vezet ket pell ganto

Eguis ar vestl nad int c'huëro.

*An Doctor.*

Petra a ra da gals a dut

Divar o fen caout mil disput ?

*Ar Buguel.*

Petra ma zeo an dud-se sod,

Eus a vil malheur clask o lod.

*An Doctor.*

Ha te anve plac'h fur ebet ?

*Ar Buguel.*

N'a m'eus ket cals anavezet :

Ar plac'het fur, var a glevàn,

Ne d'int ket commun er vrô-màn.

*An Doctor.*

Pe da lec'h eta int-hi êt ?

*Ar Buguel.*

Elec'h n'en d'eus ket a voaset :  
Biscoas plac'h fur , fur na voe pell  
O c'henti goas na ne voe vell.

*An Doctor.*

Ha na dleer ket en em c'henti  
Evit caout lec'h da zimizi ?

*Ar Buguel.*

Dimizi a zo permetet,  
Mes sotoni eo kemeret  
Eur plac'h en d'eus meur a c'halant  
Hac eus an oll a zo contant :  
Guell eo guénen caout eur mignon,  
Eguet eur plac'h en donézon.

*An Doctor.*

Ha te c'heus cals a vignonet ?

*Ar Buguel.*

Ar ansavàn mignon ebet.

So vignonet eus ar bed-màn

Ne inconstant, var a glevàn :

Dibaot a zén a ve tromplet  
O re fiziout er mignonet.

*An Doctor.*

Pegueït e pad ar vignonach ?

*Ar Buguel.*

Bete'n ezom, pas davantach.

Nep en d'eus arc'hant hac a rô  
A gav mignonet e peb brô ;  
Mar deu ezom dezàn goude,  
E vignonet en dizene.

*An Doctor.*

Petra ra nep a brest arc'hant  
Da eur mignon hep caout goarant ?

*Ar Buguel.*

C'hoant coll en d'eus hervez fêçon  
Hac e arc'hant hac e vignon :  
Kenderv gompes out pa bresti,  
Ha dèn ingrat pa c'houlenni.

*An Doctor.*

Na nep a ra eun donézon,  
Petra sonch-ën en e galon ?

*Ar Buguel.*

Sonjal a ra en devezo  
Daou c'hement mui eguet na ro :  
Panevet se, certenamant,  
Nebeut a zén a ra presant.

*An Doctor.*

Hac èn a zo dên e nep canton  
N'en d'eus adversour ha mignon ?

*Ar Buguel.*

Dibaot den a zo er bed-mâ  
N'en d'eus er c'har hac er c'hassà.

*An Doctor.*

Pe dious pion e renker tremen ?

*Ar Buguel.*

Diouz ar bed-oll, mar be moyen ;  
Rac ne zeus den na ell ober  
Ha drouc ha mad gand amzer.

*An Doctor.*

Pelec'h e sao disantion ?

*Ar Buguel.*

Elec'h ma vank soumission.  
An dud superb a zav ato  
Eun disput benag etrezo,

*An Doctor.*

Na pe ouz piou na renker ket  
Caout james disput ebet?

*Ar Buguel.*

Ne dleer caout gant hini,  
Ma na ellet ket trec'hi.  
Marc'h a resist ouz ar guentrou  
A ra gaou bras ouz e gostou ;  
Ha sot eo dêñ da resista  
Ouz nep zo creoc'h eguela.

*An Doctor.*

Penos e fach ar vignonet,  
Na peur e vezont accordet ?

*Ar Buguel.*

Divar ar güin peur-liessa  
E custumont en em facha ,  
Ha d'o accordi goude-ze  
E renker kaout güin adare.

*An Doctor.*

Ha te voar ive eva güin ?

*Ar Buguel.*

Re yaouankik ê c'hoas va min ;

Gant an doctoret el lezân,  
A raï guell usach anezàn.

*An Doctor.*

Nep zo pedet da eur banqket,  
Ha n'eo ket sot ma n'em da ket ?

*Ar Buguel.*

Furroc'h ê calz ma chom er guêr,  
Ma na voar eva dre voder.

*An Doctor.*

Petra ra an hini a ev re ?

*Ar Buguel.*

Diski d'ar bed oll e zoare.

Pa vez secret, mar bez mezo,

Kement a voar a lavaro,

Ha calz c'hoaz avichou ouspen,

Pa zao e vanne enn e benn.

Ar paoura tout, evet dezàn,

A zo pinvidic, emezàn !

Ha gouscoude en deveus poan

O caout yod silet da goan.

*An Doctor.*

Piou a ra d'an dud güella cher ?

*Ar Buguel.*

Nep en deus joa oc'h e ober.  
Digant eur mignon eo güel caout dour  
Eguet güin digant eun traitour.

*An Doctor.*

Mar ez pe arc'hant, te efe güin,  
Evit beza yaouanc da vin ;  
Mes n'elles eva nemet dour,  
Abalamour ma zout paour.

*Ar Buguel.*

Me ue meus nac arc'hant nac aour  
Ha gouscoude ne don ket paour ;  
Pinvidic ou coulz ha nieun,  
Pa zon contant eus va fortun ;  
Ha clévet a meus e peb lec'h  
Eo güell dour a bara sec'h  
Eguet caout arc'hant leiz an ty,  
Ma neo contant nep en deus-hi.

*An Doctor.*

Piou a zezir ha n'en deus ket ?

*Ar Buguel.*

Nep a frip ha ne c'honit ket.

Dibaot eo güelet eur prodig  
O chom pell-amzer pinvidic ;  
Dibaot iveau eur feneant  
A zestum calz eus a arc'hant.

*An Doctor.*

Piou zo beo hac en dese naon ?

*Ar Buguel.*

Nep a chom re bell var e scaon.

*An Doctor.*

Piou ne verit ket a zicour ?

*Ar Buguel.*

Nep a zo cren, ma na labour.

*An Doctor.*

Petraê avantach ar re baour

Var nep en deus arc'hant hac aour ?

*Ar Buguel.*

Eun avantach hac a zo caer :

N'o deus ket aoun rac al laer ;

Rac ne veler ket al laeron

O vont nemeur en o c'hanton.

*An Doctor.*

Pelec'h eta e vezont-hi ?

*Ar Buguel.*

Elec'h ma zantout eus ganti.

*An Doctor.*

Piou a zo custum da laerez ?

*Ar Buguel.*

Nep en deus aon rac paourentez.

*An Doctor.*

Ha creski ra ar voyen

O kemer madou an estren ?

*Ar Buguel.*

James den ne binvidica

Oc'h ober gaou ouz e nessa :

Ar madou drouc akisitet

Na brosperont gant den ebet.

*An Doctor.*

Nac ar madou destumet pront ?

*Ar Buguel.*

Dissila prest a gustumont.

*An Doctor.*

Hac al laeron a ell miret

N'o dese ket a boan speret ?

*Ar Buguel.*

Natur al laér eo beza lent,  
Caout aon ha spont pa za en hent,  
E sonj dezàn e zeus bepret  
Eur re benac oc'h e redet.

*An Doctor.*

Pet seurt laeron zo er bed-mâ ?

*Ar Buguel.*

Difficil ve o nivera ;  
Rac me ve an oll examinet,  
Nebeut a zen just a gafet ;  
Hac ar pez am eston muia,  
Hac a ra poan din da zonja,  
Eo ma renter en peb canton  
Enoriou d'ar brassa laeron,  
Hac eun nombr bras a re dister  
Dirac an oll a bunisser.

*An Doctor.*

Piou a gar enor er bed-mâ ?

*Ar Buguel.*

An oll a zo contant anezâ.

*Au Doctor.*

Piou a ra enor d'e nessa ?

*Ar Buguel.*

Nep en deus carantez ountâ :  
Renta enor hep carantez,  
Zo trahison pe traitourez.

*An Doctor.*

Peur e chench an dud faltazi ?

*Ar Buguel.*

Pa gresq ar madou en o zi.  
Dibaot hini, mar deus nicun,  
Na chench humor pachench fortun.  
Ar fortun vrás, an enoriou,  
Eus ar zent a ra diaoulou.

*An Doctor.*

Nac ar re glasq enoriou,  
O publia o vertuziou ?

*Ar Buguel.*

Dibaot ar yar na goll e vi  
O cana re gôude dezvi,  
Ha dibaot den en em bompad  
Nø goll e boan oc'h ober vad.

*An Doctor.*

Na te c'heus joa eus an enor ?

*Ar Buguel.*

Ne glaskàn ket a zizenor.

*An Doctor.*

Pe an enor pe ar madou

Eo a güella eus a zaou ?

*Ar Buguel.*

Güel eo brud mad ha bep-hini

Egued caout madou leis an ty.

*An Doctor.*

Hac ar bed oll a glask enor ?

*Ar Buguel.*

Coulz an azen hac an doctor.

Dibaot an den, mar deus nicun,

A zo contant eus e fortun.

*An Doctor.*

Petra a gredes-te eus an dud

A zo custum da gaout goal vrud ?

*Ar Buguel.*

Dibaot chiminal a vogued

Anez ne ve tân en oaled :

Dibaot en deus goal renom

Na dê clouar ma na dê tom.

*An Doctor.*

Pe oc'h tra ec'h eus te joa ?

*Ar Buguel.*

Ous eun dra vad pa er c'havàn.

*An Doctor.*

Petra ar mab a blij dide ?

*Ar Buguel.*

Beza bepret en graç Doue.

*An Doctor.*

A te ac'h eus c'hoarzet biscoas ?

*Ar Buguel.*

Ne gredàñ ket em be c'hoas.

Clêvet e meus o re c'hoarzia

Na zestumer nemet chagrin :

Goude C'hoarzin e teu gouela,

Goude c'hoari, huaneda.

*An Doctor.*

Perac ma remerker en peb den

Bremâ trist hac em ber laouen ?

*Ar Buguel.*

Allas ! dre ar c'henta pec'het,

D'on inconstanç omp oll sujet :

Ha na ell den moralamant  
Beza parfetamant contant,  
Ken a ello evit biken  
Possedi ar mad souveren,  
Rac bepret an adversite  
Zo harp eus ar brosperite.

*An Doctor.*

Ha te voar ive petra ra  
Ma zeus calz contant er bed-mâ,  
Ha calz all pere n'en dint ket,  
Carguet a chagrin ho speret ?

*Ar Buguel.*

Ar stad en deus ar c'honstianç  
Peurvuia a ra differanç,  
Itac nep a vev en güir gristen  
Zo paciant en e anken :  
Evel Job int contant bepret,  
Er c'hlenvet coulz hac er yec'het,  
Bepret o deveus resignanç  
D'ar gundu eus ar Brovidanç ;  
Mes er c'hontrol, an dud mechant  
A zoussr atao diezamant.

*An Doctor.*

Perac eta na chenchont-hi ?

*Ar Buguel.*

Difficit bras eo o distrei :  
Cos guezen zo drouc da blega ;  
Qent e torfe eguet eona.  
Eun den yaouanc da fall pa za,  
Na voella ket evit cossa,  
Pe mar chench eun draïc benac,  
Ne chencho ket a galon vad.  
Eu c'hos louarn hac an dare,  
Gület eur yar c'hoas a garre.  
Annep na chench a vir galon,  
A gar a goal occasion.

*An Doctor.*

Me vel ervat, buguel yaouanc,  
Ne zefot ket did a skiant ;  
Mes lavar din pez seurt micher  
A guemire gant an amzer ?

*Ar Buguel.*

C'houi zo Doctor ha den zavant,  
Lavarit din ho zantimant.

*An Doctor.*

Me falfe dîn, pa zout habil,  
Rei did eun etat difficil.

*Ar Buguel.*

Difficulte zo partout ;  
Roit din unan eus va gallout.

*An Doctor.*

Me a vel ervat ne gares ket  
Nac ar graguez, nac ar merc'het ;  
Ma o c'harfes, e raes fortun  
O temezi coulz ha nicun ;  
Mes pa ne zint diouz da zivis,  
Ret eo did beza den a ilis ;  
Ha mar qeres, en eur redec,  
Me tisqo da veza bêlec.

*Ar Buguel.*

Eus a guement-se n'on ket dign,  
Ha ne garân ket eva güin.

*An Doctor.*

Petra vezi-te-ta, manac'h ?

*Ar Bnguel.*

Aon bras am be da gaout re veac'h.

Ar froc zo dies da zouguen,  
Ha me gred e zeus meur a zen  
Mac'hal tent o chenchouz rochedou  
A rafe franqis er c'houenchou.

*An Doctor.*

Me vel ervat, diouc'h da humeur,  
Na vezi ket na Tad na Breur ;  
Mes mar keres da viana,  
Avocat ec'h elli beza.

*Ar Buguel.*

Ma ven avocat, e rank fen  
Souten ar gaou hac è zifen  
Ha rîi cuzul da bep-hini  
Diouz e humor ha faltazi,  
Pe autramant em dismeganç  
Chom hep pledi en audianç.

*An Doctor.*

Petra vezi-te ta, soudard ?

*Ar Buguel.*

Ne zon ket custum eus an art.  
Ar zoudardet oll peurvua  
A zesk deboch, a zesk pill a ;

Honnes à zo eun etat fall ;  
Ret é clask dîn eun vicher all.

*An Doctor.*

Pa na blij etat ebet dit,  
Ret é dîn da gaç da hermit.

*Ar Buguel.*

Roit eta dîn hermitach,  
Ne c'houlennàñ ket davantach,  
Raç evit chom entouez an dud,  
Emeusaoun bras n'am be goal vrud.

*An Doctor.*

Pe seurt goal vrud a pezo-te,  
Mar bevez mad hervez Doue ?

*Ar Buguel.*

Ar bed oll a zo dicriet,  
Ha n'o defe ket faziet ;  
Ar véleyen coulz ha re all  
A zo sujet d'an teodou fall ;  
Ar venec'h en o c'houentchou  
N'int ket exant diouz têodadou ;  
Ar priedou, ha tad ha mam  
A zo bepret dindan o blam ;

Ar graguez qèz hac ar merc'het  
A zo gañto disenoret ;  
Mestr ha mestrez o tempesti,  
Servicher o feneanti,  
Tud a justiç o revina,  
Ar varc'hadourien o trompla,  
An dud-jentil o voal-dréti,  
Ar baysantet o vurmuri ;  
Na zeus itron na demezel  
A vez exant diouc'h o zrav el ;  
Ar bed oll zo tud fall dezo,  
Ne chommin ket gante er vro.

*An Doctor.*

Pa c'hens aoun rac an téodou fall,  
Me royo did eun avis all :  
Studi caer a bez eun Doctor,  
Den na doucho eus da enor.

*Ar Buguel.*

An Doctoret couls a re all  
A zo sujet d'an téodou fall ;  
Enoret ve o c'halite,  
Pa ne vet o superbite,

Hennes eo viç an dud savant,  
Cant vanite eus o skiant.

*An Doctor.*

Va buguelic, fouettet viot,  
Rac re scânyic e zoc'h a déot.

*Ar Buguel.*

Mar bezàn fouettet, me zo sur  
Nep am fouetto ne vo ket sur :  
Perac fouetta eur buguel qêz,  
Rac ma lavar ar virionez ?

*An Doctor.*

Ar virionez zo cassaüs.

*Ar Buguel.*

Ia, d'an nep a zo cablus.  
Ret eo lezel nep en deus gal  
D'en em grafat ha da c'hognal.  
Nep a gunduo goal vuez,  
A vezò flemmet alies.  
Parlant a rit eus a souetta :  
Fouettit hoc'h azen da guenta,  
Ha mirit ho skiant ganeoc'h ;  
Me gavo güel Mestr eguedoc'h.    FIN.

